

KANNAOIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 93 Here - Du - Kerzu 2015 Priz : 3€

Prederiadennoù war an dic'houest ma-z omp...

An dic'houest ma-z omp da stourm a-gevret...

Da geñver an dilennadegoù-rannvro e Breizh melestradurel (B 4) e derou miz Kerzu 2015, n'on ket bet ken souezhet-se e vije bet unnek listenn o kenstrivañ, hogen kentoc'h ma vije bet en o zouez peder listenn eus an Emsav, pe eus al Ledemsav evel ma lavare lod broadelourion er bloavezhioù seikont. Ha c'hoazh, evit kronikourion 'zo, e vije bet ur pempvet hini gant listenn Marc Le Fur a wisk divezh ar Gwenn-ha-Du, hag a zifenn start adunvanidigezh Breizh, gant distro Bro-Naoned d'ar gêr ; unan all en em c'houlenne ha ne vije ket bet ret kontañ ur c'hwec'hvet gant hini Gilles Pennelle (FN) p'en doa lakaet e dri-liv en e c'hodell ha dispaket ledan ar Gwenn-ha-Du, ha diskleriet stourm, eñv ivez, evit adunvanidigezh Breizh. A-dra-sur, en un doare splann a-walc'h, eo bet bezant keal Breizh en dilennadegoù-rannvro-se, hag arabat disoñjal ez eus bet ivez ul listenn evit stourm evit adunvanidigezh Breizh, hini Gilles Denigot, el Liger Atlantel, hag ar wech-mañ n'eus ket bet dizemglev etre ar strolladoù breizhat ; met siwazh, ret e oa bezañ bezant e peurrest Broioù-al-Liger, peogwir ez eo ret bezañ danvez-kannad evit ar rannvro a-bezh, daoust pegen kevanaozel

ez eo, ha se n'eo ket ur saviad ken aes-se evit ul listenn kenaozet gant Breizhiz hepken.

War unan eus al lec'hiennoù breizhat em eus lennet e oa frealzus an dra-se, dre ma tiskoueze ez eus d'an nebeutañ nerzhioù e Breizh a stourm evit ur Vreizh a vefe muioc'h mestrez war he zonkad. N'eo ket diwir an dra-se, met un tamm unded ne rafe ket a zrouk, gwelet hon eus armeoù niverus, hogen na rene ket enno an



unded gourc'hemenn, bezañ faezhet mik gant armeoù all, gwanoc'h o niver, met leviet gant ur penngadour speredek-dreist. Bez' e c'heller keñveriañ saviad Breizh gant hini Bro-Skos pe Kembre : enno ez eus ivez strolladoù broadelour pe ledvroadelour, gant e-barzh tud n'o deus ket rik an hevelep mennozhioù, met d'an nebeutañ o deus holl, a-us da gement-se, an hevelep uhelvennad,

dieubiñ o bro diouzh ar galloud saoz o dalc'h dindan gazel-gae. Dalc'hit soñj eus an dilennadegoù diwezhañ e Breizh-Veur : tost an holl sezioù e Bro-Skos a voe gounezet gant ar *Scottish National Party* ! Pegoulz e soñjit e c'hellor gwelout an dra-se e Breizh ? N'eo ket warc'hoazh, em eus aon, e c'hoarvezo an dra-se, mar ne glaskomp ket ober hon emzezhvarn¹, ha lakaat hor c'healioù personel a-gostez, evit tizhout ar pal pennañ a zo dieubidigezh Breizh.

¹ Emzezhvarn : *autocritique*.

Kemeromp ur skouer, al listenn renet gant Kristian Troadeg, maer Karaez. Klasket en deus bodañ en-dro dezhañ tud eus an Emsav, eus an tu kleiz betek an tu dehou, da lavarout eo eus an UDB betek ar Strollad Breizh/Parti Breton. Un dra vat e vije bet o vezañ ma n'omp ket ken niverus-se, met se en dije diskouezet d'an dud e oa tud mennet da ober traoù a-gevret evit Breizh, hag evel-se e vije dastumet muioc'h a vouezhioù. Hogen ne oa ket diouzh grad an UDB a felle dezhi ober hepken ul listenn gant tud a gleiz, ha K. Troadeg hag a chom, daoust pe zaoust, un den a gleiz, en deus pleget da c'hoantoù paotred an UDB, kuit da dud ar Strollad Breizh/Parti Breton mont da glask emglevioù gant tud all evit sevel ul listenn all ouzhpenn, pezh o deus graet gant listenn Bertrand Deléon, en em zisklêr krenn-ha-krak evit dizalc'hiezh Breizh. Kement-mañ a zigresko niver ar mouezhioù evit pep hini, ha war un dro a zigresko ur chañs da gaout kannaded, a c'hellfe pouezañ er c'huzul-rannvro, evit ma vefe douget muioc'h a vri da arc'hadurioù² an Emsav dre vras, hag e soñjan pergen e kelennerzh ar brezhoneg hag en adunvanidigezh Breizh.

Perak kement a ziforc'h etre Breizh hag ar broioù keltiek all - Skos ha Kembre – en o emzalc'hioù er stourm evit en em zieubiñ diouzh galloud ur Stad kreiz estren o mac'hom ? Evit Kelted tramor ez eo marteze en abeg d'ar reizhiad dilennel breizhveurel a zo disheñvel-krenn diouzh ar reizhiad gall, ha ne lez chañs ebet gant ar strolladoù bihan da bouezañ er c'hoari, peogwir n'eus peurvuiañ nemet un drovouezhiañ. Gant ar reizhiad gall gant div drovouezhiañ, ez eus etre an div dro marevezh an treuzgreadoù³, marevezh an treuzvarc'hata : gant ar re ha ne c'hellont ket kenstrivañ ken, ez eo poent moneizañ o mouezhioù ha dikleriañ evit piv e kuzuliont mouezhiañ evit an eil tro hag evel-se e tiskouezont ez hanvezont⁴. A-wechoù ez eus tu da gevraouiñ ur plas mat el listenn a c'hellfe bezañ trec'h, hag ez eo aze ma welomp an darn vrasañ eus listennoù an “Emsav” hag a zo a-gleiz evit an darn vrasañ anezho da guzuliañ mouezhiañ evit listenn ar sokialourion c'hall, e-lec'h lavarout fraezh n'o deus fiziañs ebet er strolladoù gall, pe lezel an dud da varn hervez o c'hoant.

² Arc'hadur : *revendication*.

³ Treuzgread : *transaction*.

⁴ Hanvezout : *exister*.

Siwazh ar strolladoù breizhat, dre vras, n'o deus ket mui o mennozhioù dezho, mennozhioù a spered breizhat glan ; kemer a reont mennozhioù ar strolladoù gall. Abaoe daou gantved a skol c'hall republikan ez eo bet mentrezhet⁵ empennoù ar Vrezhoned da vezañ Gallaoued vihan vat, diaes eo dezho en em zizober diouzh al levezon-se. N'eus nemet Istor Bro-C'hall a zo bet kelennet d'ar Vreizhiz, gant kurioù brezel harozed Bro-C'hall, listenn tud veur Bro-C'hall – gouizieion, skrivagnerion, mezeion, politikerion, ergerzhourion hag all -. Ne vez ket kelennet Istor Breizh er skolioù Diwan hiziv, ret eo dezho heuliañ roll-kelenn Deskadurezh Vroadel C'hall, daoust ma ne vez mui kelennet kalz Istor Bro-C'hall evel gwechall, ha zoken skeud un Istor, a lavar ur mignon din kelenner, ha se a ziskouez pegen brein eo deuet da vezañ Bro-C'hall en he diazezoù zoken, hag e kendalc'her da vezañ feizleun dezhi, evel loened doñv ha n'o deus anavezet mestr all ebet, ha gwir Bater eo se pa weler an anvioù a vez roet e Breizh, da straedoù ha balioù hor c'hêrioù : anvioù tud veur Bro-C'hall a zougont, ha pa voe klasket reiñ anv Roparz Hemon da lise Diwan er Releg e voe klevet kercent al laïkourion c'hall o sevel o mouezh, ha pleget e voe d'o c'hoant gant renerion Diwan, evit ma ne vefe ket lamet diganto ar skoazelloù arc'hant o deus ezhomm evit arc'hwelañ⁶.

Ar vevelion o saveteiñ o mistri : Bez' e stadomp ez eus bet peder listenn vreizhat emsavel oc'h heuliañ ar diskanterezh⁷ gall, hogen er peder-se ez eus bet teir diouto diskleriet a-gleiz. Pa-z eus e Bro-C'hall ur fiñvadeg tost gwitibunaneke eus an dilennerion war-zu an tu-dehou, da heul politikerezh drastus F. Hollande hag ar sokialourion, e chomfe dilennerion Breizh eoriet en tu kleiz. Iskis eo an dra-se memestra, pa oa brudet Breizh da vezañ ur c'hreñvlec'h eus ar gatologiezh, n'eus ket pell 'zo c'hoazh. Pa-z ae ar Vreizhiz yaouank da ober o servij-soudard en arme c'hall war-dro ar bloavezhioù c'hwegont - da vare brezel Aljeria lakaomp -, pa lavarent e oant breizhat e veze lavaret dezho ne oant ket gall, evel d'an Elzasiz – pezh a oa ar wirionez – hag evit peurlivañ an daolenn e veze lavaret dezho : “ar Vreizhiz ez eus anezho beleion pe vezvierion hag eus ar Breizhadezed seurezed pe gisti !” Ar gerioù

⁵ Mentrezhet : *formaté*.

⁶ Arc'hwelañ : *fonctionner*.

⁷ Diskanterezh : *clivage* ; *ivez* : *disklenterzh*.

“mezvierion” ha “gisti” a oa evit feukañ ar Vrezhoned, hogen ar gerioù “beleion” ha “seurezed” a oa evit merkañ e chome ar Vrezhoned, e spered ar C’hallaoued, da vezañ bepred “revrioù benniget” ha “kalotined”, hervez o galleg flour ha kempenn.

Lod a c’hellfe marteze poellata gant komzoù broadelour, ha lavarout e tiskouez an dra-se – an eoriadur padus a-gleiz - ez omp ur bobl disheñvel diouzh ar bobl c’hall. Un tammig skort eo an dezrann-se, seul vui ma n’eo ket un eoriadur a bad a bell ’zo. Da gentañ e tleomp stadañ e chom Breizh, neket ur vro trevadennet evel ma felle da dud ’zo evel re an UDB ober ac’hanomp war-dro ar bloavezhioù seikont pe eikont, hogen kentoc’h ur vro vestroniet : an darn vrasañ eus ar begennoù breizhat a zo tremenet e servij ar mestronier, da lavarout eo ar Stad c’hall. Ne oa ket diaes d’ar begennoù breizhat ober an tremen-se, goude bezañ bet mentrezhet e-pad daou gantved gant ar skol c’hall hag he deus diverket diouzh o dremmwel bredel⁸ kement tra a oa bet Breizh gwechall ha pezh he dije ranket bezañ mar bije bet chomet mestrez war he zonkad. Ouzhpenn-se, ar Vrezhoned, goude bezañ bet mezhekaet gant ar C’hallaoued a-zivout o yezh, o gizioù gwiskamantel, o relijion hag o eoriadur kozh a-zehou, a chom, tamm pe damm en un doare dispis, gloazet en o lorc’h. Mouezhiet o deus a-gleiz evit heuliañ an ambilherion⁹ a c’hourbanne ar meziennoù gall e oant ar re a c’helle saveteiñ ar vro. Ne oa ket gwir, met diegi o deus hiziv ar Vrezhoned da gemm penn d’ar vazh adarre, n’int ket tud o kemm mennozhioù ken buan ha ma tro an avel. Ezhomm ez eus bet dezho degadoù a vloavezhioù evit tremen eus an tu dehou d’an tu kleiz, hag evit ober an hent-enep o devo ezhomm tost kement a vloavezhioù eget ar re a zo aet ganto evit o emdroadur kentañ.

Evit hastañ an emouezadur-se, dreist-holl e-touez re an Emsav, e plijfe din reiñ va soñj war ar sokialouriezh he deus eilpennet kalz a draoù e spered an emsaverion war-lerc’h miz Mae 1968 ha Vatikan II, mui pe vui en hevelep mare, pa veze laosket ganto d’ar seizh avel al lugan droch-mañ : “Breizh a vo sokialour pe ne vo ket !” Gant tost an holl emsaverion eo bet dilezet ar vroadelouriezh, evel ma rebeche Tepod Gwilhmod da Tangi Louarn en e bennad “*Hep tiegezhioù brezhonek, brezhoneg ebet*” (K.

⁸ Bredel : *mental*.

⁹ Ambilher : *leader*.

Imbourc’h 92), evit kemer ar sokialouriezh da goaliadurezh¹⁰ stourm. Evel-just e oa diaes er c’houde-vrezel en em ziskouez broadelour brezhon, pa veze lakaet an hu war izili kozh *Breiz Atao* hag ar *PNB* gant ar Stad C’hall hag he mevelion e Breizh e touez ar pennoù bras, hogen un dek pe ugent bloavezh bennak goude e oa bet sioulaet an traoù, hag e c’helled adkregiñ gant ar stourm broadelour, met ne voe ket graet. Tremenet e oa dre aze brizh dispac’h miz Mae 1968 ha ivez evit ar gloer Vatikan II. Soñj am eus c’hoazh eus an daelerezh a oa bet er MOB¹¹ er bloavezhioù c’hwegont, pa oa sach-blev etre tu-dehou ha tu-kleiz ar strollad, hag eus an diaes ma oa da ober ar c’hevandod¹². Bez’ e veze diskouezet gant darn pegen arvarus e oa eurediñ broadelouriezh ha sokialouriezh, rak buan e vefe graet an droukvesk¹³ gant an *Nazional-sokialouriezh*.

Diac’hinad¹⁴ an diac’hinadoù

Gourzhebek¹⁵ eo “broadelouriezh” ha “sokialouriezh”. Ar vroadelouriezh a zifenn ur bobl war he ziriad, he gwir d’en em ren ha d’en em ziorren hervez e ijin dezhi, pa fell d’ar sokialouriezh ober diforc’h ebet etre ar pobloù, meskañ anezho, distrujañ an harzoù ha distrujañ diazez hengounel ar gevredigezh a zo an tiegezh gant an eurediñ heñvelreviat, evel hon eus gwelet nevez ’zo e Bro-C’hall gant ar Strollad Sokialour Gall. Gwelet hon eus an UDB ha Kevre keltiek, ma-z eo Tangi Louarn e penn anezhañ, o vanifestiñ e Kemper a-du gant ur voskeenn durkiat da sevel er gêr-se. Pa oa bet skwatet an iliz St Bernard e Pariz gant un toullad Afrikaned, anvet “dibaper”, e oa bet embannet gant ur strollad breizhat eus an tu kleiz pellañ e vefent deuet mat e Breizh. Pa voe savet ar strollad broadelour breizhat Adsav e voe distaolet gant an holl gronnadoù breizhat tamm pe damm a-gleiz, n’eo ket kement-se dre ma oa broadelour hogen dre m’en em zisklerie a enep an enbroerezh muslimat. Difenn e vro hag e bobl a oa deuet da vezañ ar pec’hed bras dibardon, evit kement hini a anzavfe bezañ tamm pe damm broadelour pe kar-e-vro.

An holl dud vat-se a en em zisklêr mui pe vui sokialour e Breizh, en em zisklêr ivez bezañ a-

¹⁰ Koaliadurezh : *doctrine*.

¹¹ MOB : *Mouvement Organisation Bretagne*.

¹² Kevandod : *synthèse*.

¹³ Droukvesk : *amalgame*.

¹⁴ Diac’hinad : *paradoxe*.

¹⁵ Gourzhebek : *antinomique*.

enep ar gevalaouriezh, a-enep ar gellidourion¹⁶ vras, a-enep ar vankerion vras, a-enep renerion an embregerezhioù bras etrevroadel, met e gwirionez e prientont an dachenn evito, ober a reont al labour evito hag evit ur bennozh-Doue ouzhpenn-se. Petra 'fell d'ar gellidourion vras, d'ar vankerion vras, d'ar renerion vras, hag a zo bedelourion daonet ? Ur bed diharz, ur bed hep broadoù, ur bed gant pobloù diwrizennet, diene, hep istor kevun, diemouez¹⁷ eus o zremened hag hironet ar muiañ ar gwellañ, evit gellout o tunembreger¹⁸ hervez o c'hoant. Setu perak e pennluskont ar sioc'hanerezh en Europa ha da c'houde e pennluskont an enbroerezh afrikat ha muslimat¹⁹ war-zu Europa, kement-se evit na vefe mui harz ebet d'o raktunioù marvus da ziazezañ ur gouarnamant-bed. Va digarezit, met an dud a-gleiz e Breizh a heuilh an hevelep linenn-se, pa asantont d'ar sioc'hanerezh, d'an enbroerezh, d'an daskemmoù kevredigezhel a zistruj an tiegezhioù, hag all... a zo bedelourion d'o zro.

An doare gwellañ da gaelañ ouzh raktresoù ar vedelourion ez eo difenn ar broioù bihan evel Breizh gant harzoù kedanavezet, pezh n'eo ket a-enep broadoù all Europa, pa ouzomp ez omp eus an hevelep sevenadurezh kristen, pezh a vez nac'het hiziv gant an Unvaniezh europat, a zo ur savadur bedelour en he stumm-bremañ. Pa oa aet ar Pab Fransez da Lampedusa ha p'en doa skourjezet Europiz o tamall dezho mankout a garitez, p'o doa diegi hervezañ da zegemer an holl alouberion afrikat-se, ez eus bet meur a Gristen o soñjal n'edo ket ar gwir gantañ. Lavarout ne vez ket skoazellet a-walc'h ar pobloù-se en o broioù gant pobloù europat e c'hellfed sevel a-du gant-se, daoust ma vez brokus an Europiz evit reiñ arc'hant da ne ouzon pegement a ONGoù karget d'o skoazellañ, met asantiñ da vezañ aloubet gant tud arallouenn, a relijion hag a stuzegezh disheñvel a zo ur gobidell all. Da vare Tour Babel en deus an Aotrou Doue mesket lavar an dud evit na chomfent ket en ul lec'h hepken, hogen evit ma vefe marellet an douar a-bezh gant pobloù disheñvel. Kadarnaet e vez gant Jezuz oberenn e Dad pa gomz meur a wech en Aviel eus pobloù

¹⁶ Kellidour : *financier*.

¹⁷ Diemouez : *inconscient*.

¹⁸ tunembreger : *manipuler pour influencer*.

¹⁹ Gouzout a reomp ez eus a-dreñv alouberezh bras Europa gant repuidi ar Reter-Nesañ kelligerezh diazeadennoù bras amerikat evel re Ford, Rockefeller, pe George Soros a orin yuzev hungariat ha pinvidik-mor.

disheñvel, eus yezhoù disheñvel, eus broadoù disheñvel ; ne lavar ket e tle Europa, da skouer, dont da vezañ ur Babel nevez, gant un enbroerezh o treiñ da alouberezh gwitibunanek. Arabat eo kemmeskañ hollveziadelezh kristen gant hollveziadelouriezh²⁰ bedelour. Hiziv an deiz e komz Jezuz dre gemennadennoù da dud 'zo dibabet gantañ dre ar bed a-bezh a-zivout ar vedelourion. "E enebourion" e vezont anvet evel-se gantañ, er par relijiel pa vez pennlusket ganto relijion satanek an *New Age*, er par moneizel pa ziskuilh pezh a brient deomp ar vankerion vras, e par an hinad pa gomz eus an dirsav HAARP (*High Atmosphere Auroral Research Program*) staliet e Gakona, Alaska, a c'hell daskemmañ an hin kement ha servij da arm bellerezhel, hep komz eus ar grug²¹ RFID (*Radio Frequency Identification*) evit an dud, merk an Diaoul hervez Diskuliadur St Yann, hag a c'hell reoliñ penn-da-benn an dud. Pa gomz Jezuz eus ar vedelourion, e lavar "bedelouriezh vabeliat". Un arouez eo !

War-lerc'h mesbukadoù islamek Pariz eus an 13 a viz Kerzu, e tlefe marteze ar Pab kemm mennozhioù, ha kalz tud all ivez²², e Breizh hag e lec'h all...

Donwal Gwenvenez

²⁰ Hollveziadelouriezh : *universalisme*.

²¹ Krug : *puce électronique*.

²² E niv. 547 « YA ! », war-lerc'h ar gwalldaol eus an 13 a viz Du kaset da benn evit darn gant islamourion deuet-tre e Frañs mesket e lanvad an enbroidi dibaper, ha pemp devezh a-raok kentañ tro mouezhiadeg ar rannvro e veneg Job an Irien « *sorc'hennoù kasaus an tu dehou pellañ a lavar deomp ez omp e danjer da vezañ aloubet gant an dud estren* ». Emañ o c'hoarvezout dirak e zaoulagad ha ne wel ket. Ouzhpenn-se evidomp broadelourion, bezañ aloubet gant estren gall a zo un dra anat abaoe 500 vloaz. Ar melting pot a ya bepred war-raok e Breizh : nebeutoc'h nebeutañ a anvioù-familh breizhat a vez dre holl e Breizh. Hon dever eo chom ar pezh ez omp, talañ ouzh ar Gall hag an Estren. « *En hor yaouankiz en deus Doue fiziet ennomp amzer da zont hor bro* » emeze Yann-Vari Perrot. « *Degemer hep aon ar re a sko ouzh hon dor* » a skriv c'hoazh ar beleg Irien, met ar re-se ne skoont ket hepken ouzh hon dor : en em staliañ a reont er vro. Dija ez eus kalz muioc'h a durkeg e Kemper eget a vrezhoneg, ouzhpenn ar galleg a zistruj ken sur ha tra pezh a chom eus hon dibarelezh.

Daoust hag ez eo Frañs gwir vro J. An Irien ? Neuze e teu e gomzoù da vezañ boull. Kinnig a ra kentoc'h reiñ « *ar plas kentañ d'ar stourm a-enep ar saotradur ha d'an emgann evit an hin* ». Un dra a raio d'an holl reiñ o asant... met ne gomz ket eus ar politikerezh eus an Ankou a vez renet gant « *Ar Re C'hlas* » hag an holl strolladoù gall gwitibunan a-enep ar vuhez hag an tiegezhioù, war bouez piv ? War-bouez an FN. Ne fell ket dezhañ anzav emañ an FN an tostañ eus kelennadurezh divezel an Iliz : a-enep an diforc'hañ bugale, ar planning familial, damkaniezh ar gender, eurediñ an heñvelreizhidi, ar PMA, ar GPA, hag all... Enebour an Emsav eo an FN, a zo ur strollad broadelour (impalaerelour ?) gall kreizenour ha stadelaer, hogen spontus eo gwelout zoken beleion 'zo chom hep ober ar c'hemm ha bezañ dallet daoust d'ar fedoù.

Danvez preder gant P. Kalvez

Nedeleg 2015

“Ar pep pouzusañ n’eo ket en deus un den baleet war al loar, met en deus Doue kerzhet war an douar e korf Jezuz Krist” eme James Irwin e 1971, an eizhvet den o vezañ kerzhet war al loar.

Lavar din e pe yezh e pedez hag e lavarinn dit piv ez out.

Pedet hon eus hiziv e-kerzh Oferenn ar barrez evit an divroidi dre ma oa ivez Deiz Etrebroadel an Divroidi. H.T.S. ar Pab en ur hetin bloavezh mat e 2014 d’ar gannadourien dileuriet er Vatikan gant holl Stadoù ar bed (war-bouez un daouzek bennak), en deus lavaret : “Ouzhpenn ar buhezioù distaolet en abeg d’ar brezelioù ha d’ar c’hleñvedoù, ez eus buhezioù kalz a dud dilec’hiet ha repuët. Da heul an dispac’hoù hon eus meneget e tec’h miliadoù a dud diouzh o douar orin. A-wezhioù n’eo ket kement-se evit klask un dazont gwelloc’h, met eeun-hag-eeun evit kaout un dazont, peogwir e talv chom en e vro bezañ lazhet. (...) Ret eo degemerout dre lezennoù dereat a oar war un dro gwareziñ ar geodedourien ha gwarantiñ un degemer d’an divroidi. En ur drugarekaat an holl re a sikour, zoken en arvar o buhez, an divroidi, e c’hourpedan ar Stadoù koulz hag an aozadurioù etrebroadel da vezañ oberiant da ziskoulmañ ar c’hudennoù denel-se ha da bourchas da vroioù orin an divroidi skoazelloù evit mad o diorroadur kevredigezhel ha politikel ha da echuiñ gant o brezelioù-diabarzh hag a zo pennabeg an divroadeg. Ret eo oberiañ war an abegoù ha n’eo ket hepken war an heuliadoù. Ha kement-se a roio tu d’an divroidi da zistreiñ un deiz d’o mammvro ha da gemer perzh en he c’hresk hag en he dorren.

“Mar fell dit bevañ er peoc’h, paouez da skuilhañ gwad an dud digablus !” Sant Sebastian d’an implaer Diocletianus.

“Pevar-ugent diwar gant gall yaouank o vont d’ar djihad a zo bugale tiegezhioù dizoue. hervez Kreizenn Diarbenn Sektennoù e liamm gant an Islam : azon un diaezamant bezañ seul donoc’h ma ne reont ket foutre kaer gant ar prezegennoù kleuz war al laikelezh.” J-P Denis, La Vie 3612.

Jezuz a lavar : Deuit d’am heul, ha n’eo ket hepken da heul va c’homzoù.

Liammet strizh eo kudenn an euredoù ouzh kudenn ar feiz. HTS ar Pab Frañsez.

An Aotrou Doue ne c’halv ket ar re a zo gouest, met lakaat a ra da vezañ gouest ar re a c’halv. (Person Orvez)

Rein ul louzoù d’un den evit e lakaat da gousket betek e varv, ha lavarout eo evit bihanaat e boanioù

ha n’eo ket evit e lazhañ a zo pilpouserezh. Doktor Sicard.

En em vodet ‘eo Eskibien Bro-vMec’hiko e-pad tri devezh evit adwelout troidigezh an Testamant Nevez e yezh ur bobl henvroat, ar Tsotsiled, komzet gant 350.000 a dud.

“Gwir gudenn hon istor er mare-mañ eo e steuz an Aotrou Doue diouzh dremmwel an dud, ha dre ma steuz ar sklerijenn o tont dioutañ ne oar ket an denezh da belec’h ez a, ar pezh a zegas mui-oc’h-mui a zistruj enni”. Benead XVI.

“Un emgann speredel a-enep Spered an Droug eo an 40 devezh kent gouel ar Pask... An dezerzh eo al lec’h ma c’heller klevout mouezh an Aotrou Doue ha mouezh an Diaoul ; en trouz, en turmud ne glever nemet mouezhioù diwar c’horre. En dezerzh e c’hellomp diskenn ennomp hon-unan, e-lec’h ma c’hoarvez evit gwir hon tonkadur, ar vuhez pe ar marv. Ha penaos e klevimp mouezh an Aotrou Doue ? A-bouez bras eo anaout ar Bibl, anez da se ne ouezomp ket respont da gorvigelloù an Diaoul. “ HTS ar Pab Frañsez.

“Kalzig a dud a vez badezet da Bask. Meur a hini siwazh, ne gredint ket hel lavarout en o ziegezh pe en o endro micher ; aon o deus bezañ lakaet a-gostez. “ Un Eskob e Normandi.

“N’eo ket diouzh kement a lavaran na diouzh kement a ran e ran vad d’ar re all, met diouzh kement ez on, ha diouzh ment gras Doue a ambroug va c’homzoù hag oberoù“. Charles de Foucauld.

“Dre al labour e tizher an diskuizh ; ha dre ar marv e c’hounezer ar vuhez.“ Sant Leon Meur Pab, lennadenn eil Sul ar C’horaiz, troidigezh Job Lec’hvien, Imbourc’h 2001, niv. 367 p. 40.

“Un nemedenn istorel, ur fed ezreol eo ar relijion gristen, ur gouskoevad evel ma vez anvet er fizik ur c’hoarvoudenn na zlefe ket c’hoarvezout hervez ar poell”. Jésus après Jésus, G. Mordillat & J. Prieur, Le Seuil. Levr burutellet mat gant Herve Latimier en Al Liamm 408 p.83.

“*Britannia tot accincta portubus*” (Breizh(-Veur) hag he deus kement a borzhioù-mor). Ausonius, barzh eus Bourdel, 309-394.

“Evit rentañ d’un den e benn eo ret rentañ dezhañ da gentañ e zivesker.” E koun Michel Menu krouer ar Goum e 1969 ; nevez aet da anaon en e 99 vloaz.

“Berniañ tud reuzeudik a gresk reuzeudigezh pep hini.” Ti-retred ar re gozh. “Mar plij, kemmit buhez, paouezit d’ober an droug ... evit mirout a vont d’an ifern”. HTS ar Pab Frañsez d’ar Mafia.

“Entanet e oan gant ar c’hoant tennañ an torfedour-se diouzh tan peurbadel an ifern”. Santez Tereza ar Mabig Jezuz.

“Ar c’hementad a zroug a zo ennomp ne c’hell bezañ distrujet nemet dre sellout ouzh un dra bennak glan penn-da-benn”. Simone Weil e-pad an Eil Brezel Bed.

“Prederouriezh Platon a c’hell lakaat war hent ar gristeniezh”. eme Blaise Pascal. “Levriou Houellebecq ivez”, gant ma tiskouezo ar Gristenion dremmoù laouen tud salvet”. Denis Moreau prederour naonedad.

Ma ne vez ket a joa diwar ar feiz kristen n’eo ket ur feiz kristen”. HTS ar Pab Frañsez.

“N’o deus netra, nemet Doue”. eme ar skrivagner sinaat Liao Yiwu diwar-benn kouerien baour bro Yunan m’eo ar Feiz kristen o feadra nemetañ. Dieu est rouge, Books Editions.

“Anat eo e voe lakaet an diskibled o welout Jezuz bev goude e varv dirak un darvoud na oa biskoazh c’hoarvezet na meneget nag ijinet ; digompren ha spontet, e tizoloent trumm un dra bennak diwirheñvel ha spouronus, ur bed all na oa ket o hini nag an hini o doa anavezet e-pad tri bloaz e kompagnunezh ar rabbi Jezuz war hentoù sioul Galilea. Mar doa eñ a welent deuet eus bro ar marv e oant e riskl da soñjal ne oa ket bet un den gwirion. Setu perak e roe emgav dezho e Galilea en-dro”. Eloi Leclerc O.F.M. (Magnificat Ebrel 2015, p 206).

“Neb na gar ket ar wirionez, ne oar ket c’hoazh tamm ebet petra eo. (...) Anaout a rit, n’eo ket dre ar feiz, met dre ar garantez”. Sant Gregor Meur pab,

“Mirit, mirit, evel ibilh ho lagad, yezh kaer hoc’h hendadoù, hi hag a vir ho feiz. “ HTS ar Pab Pius IX e 1847 d’un eskob a Vreizh.

“Kaset e vez da get an egor gant a-raokaat an dezougen, hag an amzer gant ar binvioù kehentiñ elektronek”. Xavier Patier, skrivagner.

(Neuze ne vefe ket ken a zouaroniezh, nag a istor, nag a vroioù, nag a vroadoù, pa ne vije ket bet al liesyezegezh mennet gant Doue (Geneliezh, pergen 11, 1-7) nag implij an araezioù kehentiñ er broioù ha yezhoù lec’hel evel ma reomp-ni brezhonegerion.)

“Ar gristenion glouar a zo dañjerusoc’h evit an Iliz eget hec’h enebourion.” Benead XVI.

“Nec’het e c’hell bezañ ar gerent a fell dezho treuzkas ar feiz kristen d’o bugale rak ar bed e-lec’h ma kreskint n’eo ket kristen, (...) hag a seblant bevañ mat-tre hep an Aotrou Doue”. V. De Mello, beleg.

“Pa vezer mennet da zistruj ur bobl e tistrujer da gentañ hec’h istor”. Soljennitsyn. Ar pezh a zo bet

graet e Breizh gant ar skol, war-bouez gant un nebeut kentelioù istor Breizh ermaez-program er skolioù kristen.

“N’eo ket o komz e kemmer stad an traoù, met oc’h en em aberzhañ”. Clemenceau.

Daou dra hepken a c’hellomp treuzkas d’hor bugale : gwrizioù hag eskell. Krennlavar yuzev.

“Ur perzh boutin a liamm ar Sent a bep seurt : ar genfurmed ouzh Jezuz Krist. Ar c’hras-se a zo dre ret liesfurm : (da skouer) e zispriz ouzh ar binvidigezh, e vuhez a azeulerezh... “ Kelennadurezh speredel Elesbed an Drinded, p. 151, M. M. Philipon O.P. (1940).

“E yezh ar bobl e ranker komz d’ar bobl”. Sant Pêr Krisologos eskob +451.

“En arlu hepken e vezer salvet”. Paskal Marin dominigad, e “*Tes pas te transportent*” Cerf ; (En ur zougen e samm e vezer douget).

“Den ebet n’en deus Doue da Dad ma n’en deus ket an Iliz da Vamm”. Sant Kiprian eskob Kartago, (tro 200-258).

Mari, mamm Jezuz Krist, Doue ha den, a vez dalc’hmat evidomp ur vamm na baouez ket da soñjal en he bugale gant karantez... Evit tennañ hor mad eus ar garantez-se e rankomp da vihanañ kaout c’hoant anezhi, kaout fiziañs enni, bezañ prest d’he degemer. René Laurentin, beleg. E Magnificat Eost 2015, p.210.

“Petra a zesk deomp al lezenn gristen ? Traoù da grediñ, traoù da ober, ha traoù d’hor sikour d’en em santelaat. Ha ret eo gouzout al lezenn gristen ? Ya, hag ar re ne fell ket dezho he deskiñ ne c’hellont ket bezañ salvet.” Katekiz Kemper ha Leon 1908, p. 3.

“Kaout ar Feiz a zo chom hep dinac’hañ en deñvalijenn ar pezh hon eus spurmantet er sklerijenn.” Gustave Thibon, prederour peizant (+).

Ar gred dievezh. “Na roit ket d’ar chas ar pezh a zo santel, ha na daolit ket perlez dirak ar moc’h, gant aon n’o bresfent gant o zreid ha na zistrofent ouzhoc’h d’ho trailhañ.” (Mazhev 7, 6; 15, 26) : kelennit da gentañ ar grederion, a vezo ur skouer vat ha dedennus evit ar Baganed..

“An diforc’h n’emañ ket etre ar re a gred hag ar re na gredont ket, met etre ar re a glask hag ar re na glaskont ket”. Tad Denis Sonet (+ 2015)

Paol Kalvez

Arouezouriezh kristen

Er mare-mañ ma vez ar gelaouennerion a-feson, en estren-vro koulz hag e Brazil, o tisplegañ hir o soñjoù luziet e sigur menegoù eus an Islam e diskleriadennoù ziwezhañ ar Pab, e kav din ne c'heller ket kompren mat ar menegoù-se hep ober un tamm kiladenn a veur a gantved en Istor.

Gant gerioù e komzomp ni tud, an Aotrou Doue avat a gomz gant traoù ha darvoudoù koulz ha gant gerioù, a lavare Sant Tomaz Akwino. Anat e oa an dra-se d'an holl en e c'hrez-eñ, anat e oa bet adal penn-kentañ ar gristeniezh. Kalz a-raok awenañ gerioù ar Bibl d'ar Brofeded, en doa bet krouet an aotrou Doue an hollved. Sklaer neuze en deus lezet en holl groudigezh-se merkoù a bep seurt eus e Boell, al Logos doueel ennañ alc'hwez an holl anaoudegezhioù. Setu e vez klasket hardizh ar mennad doueel a-dreñv da seblantoù an hollved fizikel, gant an holl sent ha kevrinourion.

Ar Bibl end-eeun a zo leun sof-kont a zaveennoù da loened, plantennoù, meinenoù, izili ar c'horf, degouezhioù douaroniel, fenomenoù steredel hag hinadel, daveennoù a vefe digomprenus penn-da-benn hep un tamm anaoudegezh war ar bed fizikel-se. Ar c'hentañ diskuliadur eo an hollved krouet : den ne c'hall nac'hañ ar wirionezenn elfennel-mañ.

Holl bobloù pagan an Henamzer o deus strivet kalz evit gwelout ha mirout soñj eus ar c'hemenn doueel a-dreñv d'an natur, hag un doare geriadur a c'haller sevel etre arouezouriezh pobladoù disheñvel-tre a fed yezh, sevenadur, grez – ken stank al levrennadurezh war ar c'hraf-se ken e kavan gwelloc'h na venegiñ levr ebet amañ.

Euvret ha reizhet un disterañ eo bet an holl mennozhioù-se gant Europa gristen. Ar reizhadenn bouezusañ he deus pledet gant keal kozh ar fedoù naturel evel eztaolenn eeun bezañs Doue ; an holl zarvoudoù fizikel a zo daouek evit ar gristenion, diskouez ha kuzhat a reont war un dro.

Hollvedoniezh ar Grennamzer, da skouer, he doa miret brastres Ptolemeus an douar en e greiz, en-dro dezhañ ar c'helc'hioù planedennel betek an oabl ziwezhañ, annez an Aotrou Doue. Kempouezet e veze ar brastres-se gant unan kontrol ha kenglokaus avat, ma oa an Aotrou Doue e-kreiz hag an douar er c'horreenn bellañ.

An tennder etre an div skeudenn-se a ziverr meizad krennamzerel ar bed fizikel : Templ ha toull-bac'h eo war un dro. Diwar an oabl hag an douar e veze dastumet gant kristenion ar Grennamzer neket hepken un hollvedskrivadur, met un hollvedoniezh en he fezh – ur skiantenn glok war ster bezañs mab-den en hollved.

An tabut etre heolgreizelouriezh ha douargreizelouriezh he deus izelaet a-galz live dec'hmeg an dud, betek un emgann etre daou vezad danvezel penn-da-benn an eil koulz hag egile. Torret neuze an tennder etre an div skeudenn, hag aet an hollvedoniezh da hollvedskrivadur hep muiken.

An araokadennoù kalvezel da heul an hollvedskrivadur-se, o deus lakaet an dud da ankounac'haat e tiouer penn-da-benn dezhi an disterañ bedoniezh arouezel : setu bremañ dispartiet da vat ar skiant hag ar spered. Stekiñ a ra an daou rese an eil d'egile hep kenemveskañ morse, evel dour hag eoul. Ac'hann ar pezh a vez anvet “emgann etre skiant ha kravez” pe “etre feiz ha reiz”, un emgann a gemm stumm ingal, ha na c'haller lakaat etre an daou emganner nemet bevennoù dre genemglev, bevennoù ken kalfichet ha diasur evel ur feur-emglev diplomatek.

Troet an tennder daelek d'un daouegezh difiñv, evel en ur brezel ma chom pep tu en e damm fozell. Unan eus merkoù-anaout pennañ an oadvezh arnevez eo, a-dra sur, kenvezañs hollskuizhus ur skiant hep spered e-kichen ur speredelezh hep gwrizienn en natur.

Gwashaet an traoù a-galz gant René Descartes, en deus torret meizad skolastek kozh mab-den evel unanad didorradus an ene hag ar c'horf : savet ez eus bet gant Descartes ur voger-disparti etre “danvez” ha “spered”. Kaer zo bet d'ar garteouriezh plantañ reuz ha diskouez c'hoazh ha c'hoazh pegen faziiek e oa, ken don he deus sanket he gwrizioù en empennoù kornogat, ken e vez c'hoazh santet hec'h efedoù fall hiziv an deiz er fizikouriezh (sl. da skouer *An Amrin Kwantikel* gant Wolfgang Smith).

Ar garteouriezh a rann an holl skiant-bevet e div lodenn : an ergorennoù danvezel ha muzuladus, danvez ar fizikouriezh, hag an holl vezadoù – lezennoù, boazamantoù, kredennoù, oberennoù arzel, ar bed denel er ster strizh. An traoù er rummad kentañ a vuzulier hag a zielfenner forzh pegement, difennet avat kaout enno ster pe mennad. An traoù en eilvet rummad a zo ster dezho forzh pegement, difennet avat reiñ soluted dezho.

Forzh pegen anat e vefe bet dañjer seurt meizadoù evit an hollvedoniezh kristen, ez int bet euvret tizh-ha-tizh koulskoude gant kefredourion ar gravez-se. A-hed ar XVIIIvet kantved eo bet mestr ar garteouriezh war ar gelennadurezh e kloerdioù Bro-C'hall. N'oa ket c'hoazh a “vodernouriezh” d'an ampoent, met peur-dorret e oa dija unanded kefredel ar gristenion. Kroget e oa un oadvezh nevez, ma vefe paket pep ene kristen en un dibab etre bezañ lonket gant an arnevezelezh pe stourm en aner a-enep d'un enebour na c'heller morse trec'hiñ warnañ da vat – an

dibab etre bezañ “modernour” ha bezañ “hengounelour”.

Peurbrennet eo bet an nor gant Emmanuel Kant, an hini en deus toulllet un islonk didreuzadus ouzhpenn etre “meiz” ha “feiz”, o reiñ an holl aotrouniezh d'ar “meiz” hag o vac'hañ ar “feiz” e tachad strizh ar froudennoù hiniennel. Ar Gantouriezh a ren hiziv, neket war ar skolioù-meur hepken, met ivez war an holl Stadoù “laikelour” arnevez- evit al lezennoù ahiziv n'eus diforc'h ebet etre krediñ en Aotrou Doue, krediñ e korrikaned, krediñ e ezdouariz, krediñ e vertuz drammoù teogus pe bezañ ur sorser satanour.

Kendaonañ hollvedoniezh ar Grennamzer peogwir ne glot ket e munudoù 'zo gant “fedoù a c'haller gwelout er bed fizikel” a zo ken sot ha kendaonañ un dresadenn peogwir ne glot ket an tresoù liv gant lec'hiadur ar molekulennoù a ya d'ober an dra treset.

Hentennoù hollek ne c'hellont bezañ komprenet nemet ez-hollek. An naturouriezh hegreidik, a chom peg atav d'ar munudoù dister hag a lez bewech ar pep pouezusañ da vont. Dilezet eo bet fizikouriezh Aristoteles peogwir e lavare e oa kelc'hel linennoù-hent ar planedennoù ha peogwir ne glote ket e zisplegadurioù diwar-benn kouezh ar c'horfoù gant re Galileo.

En XXvet kantved nemetken o deus kroget ar ouizieion da gompren ne vez kollet tamm talvoudegezh ebet gant oberenn Aristoteles ur wech lezet ar munudoù-se a-gostez, just-a-walc'h peogwir n'eo ket ur fizikouriezh e ster arnevez ar ger – kentoc'h eo un unanad hentennoù skiantel hollek. Pevar c'hantved a lorc'hentez hag a sotoni skiantel o doa peurc'holoet un destenn a c'hellomp deskiñ kalz ganti hiziv an deiz (sl. Skridoù ar c'hendalc'h “*Penser Avec Aristote*” en Unesco, bet aozet gant M.A. Sinaceur, Toulouse, Érès, 1991).

An holl arouezelezh naturel a ra diouer ken kriz d'ar gristeniezh hiziv a zo bet ankounac'haet abalamour d'an tabut etre douargreizelouriezh hag heolgreizelouriezh, a seblante diamzeriñ skeudenn grennamzerel ar seizh sferenn planedennel, ur meizad luziet ha soutil-kenañ.

An arouezouriezh-se, bet bountet er-maez eus ar bed kefredel a zoare, ne vanas restachoù anezhi nemet e troioù-micher barzhed santimantel an oadvezh arnevez, digas d'ar Spered hag e-chal nemetken gant o zammoù fromoùigoù, a glaskent foëñvaat hag adkavout en natur en-dro dezho. El levr *l'Imposture* gant Bernanos e kaver un nebeut pajennadoù kaer war ar baouridigezh vantrus-se en dec'hmeg arnevez.

An nebeut-nebeut a studierion dedennet c'hoazh gant an dodenn gozh a zo bet lezet a-gostez neket hepken gant ar skolveuriezh dre-vras, met ivez gant ar gefredourion gatolik o-unan, a oa muioc'h e chal gant kaout brud vat dirak an naturouriezh arnevez eget gant difenn o hêrezh relijiel. Un oberenn mil mil

bouezus evel *Le Bestiaire du Christ. La Mystérieuse Emblématique de Jésus-Christ* (Bruges, Desclée de Brouwer, 1940), ma vez renablet enni gant ar studier-ilizsavouriezh Louis Charbonneau-Lassay an holl loened bet arveret evit aroueziañ Hor Salver, bet tolpet gantañ en ur weladenniñ a iliz da iliz, n'he deus sachet tamm evezh ebet koulz lavaret digant ar gatoliked (muslimiz avat a brizas kalz al levr-se, evel ma welimp pelloc'hik).

Zoken skrivagnerion a gompren an hollvedoniezh grennamzerel ne gredont ober anv anezhi nemet evel un dra arzel hepmuiken, ha bewech ma reont ne ankounac'haont ket ober an daoulinadennoù boas dirak aotrouniezh ar skiant arnevez. Ur skouerenn vev a gement emeon o paouez lavarout e voe C.S. Lewis. E oberenn e seizh levrenn, *Kronikennoù Narnia*, a oa diazezet ar raktres anezhi war keal ar bignidigezh speredel hervez ar seizh sferenn planedennel. Gant kalz evezh en doa kuzhet ez-lennegel an arouezouriezh-se avat, ken ne voe merzet nemet war-lerc'h marv ar skrivagner, gant ar buruteller lennegel Michael Ward (sl. *Planet Narnia. The Seven Heavens in the Imagination of C. S. Lewis*, Oxford University Press, 2008).

“Abaoe e ganttroadur”, eme Ward, “e veize Lewis muioc'h a wirionez er gristeniezh eget er relijionoù pagan, evel-just. Padal, pa selle ouzh ar relijionoù-mañ hep bezañ chalet gant ar wirionez, e verze brasoc'h kened enno. Setu e veze rediet da ziforc'hañ Kened ha Gwirionez, ha diforc'hañ an div re-se diouzh ar Mad. ” Fentus hag heverk eo merzout amañ Lewis, unan hag en deus strivet da adlakaat en arz tammoù arouezouriezh pagan bet euvret ha kristenekaet e Europa ar Grennamzer, enebañ ken start ouzh ar gelennadurezh skolastek a vez ar Mad, ar Wirionez hag ar Gened evel an hevelep tra – *Unum, Verum, Bonum* evel ma lavarfe Duns Scot. Mezhus eo a-benn ar fin lentegezh ar gristenion dirak kredennoù-ret ar bed arnevez.

Ar c'halvinour izelvroat Herman Dooyewerd (a oa ur prederour eus ar c'hentañ a-hend-all) a yeas un tammig pelloc'h eget ar gristenion all. Kealioù hegeliat an dezenn, enep-tezenn ha kendezenn ne dalvezent nemet evit an traoù keñverek, hervezañ ; e bed an traoù peurvoudel n'eus nemet enebiezhoù diziskoulmadus hag ar rediezh dibab. Setu perak e veze kendaonet ar brederouriezh skolastek (hag an hollvedoniezh grennamzerel en he fezh ivez neuze) gant Dooyewerd, peogwir n'he doa ket peurziverket an holl restachoù sevenadurel pagan (un dra dic'hallus da gas da benn, hag ar galvinouriezh n'eo ket deut a-benn gwelloc'h eget rannoù all ar gristeniezh evel-just).

N'eo ket souezhus e vefe bet dastumet en hor c'hrez an hêrezh sevenadurel arouezel ankounac'haet-se gant gefredourion vuslimat a zo o fal adsevel ar sevenadur kristen hengounel sur, heñchet ha renet

dre-guzh avat gant ... aozadurioù ringelennek muslimat.

Nikun, nikun evit gwir en Europa gristen abaoe ar XVIvet kantved n'en deus displeget ker fraezh ha ken helavar talvoudegezh anaoudegezhel (ha neket arzel nemetken) an arouezouriezh speredel kristen evel m'eo bet graet gant René Guénon, Frithjof Schuon, Titus Burckhardt, Jean Borella hag un nebeut re all a reer trebadelourion anezho, ar pezh n'eo ket un anv dereat penn-da-benn.

E gwirionez e oant pe ez int holl izili eus *tariqa*-ioù, strolladoù ringelennek muslimat. Hag o fal eo toullañ krogenn galet an naturouriezh arnevez peadra d'al levezon kefredel muslimat da beuraloubiñ en diwezh ar C'hornog, oc'h arverañ ar gristeniezh hengounel evel beñveg-skoazell en embregerezh-se. Kement-se a lak unan da soñjal en doare ma n'eo mui Jezuz nemet un eilrener e armeoù ar *Mahdi* e stumm islamek en eilvet Donedigezh.

Skrivagnerion nann-muslimat a veras an hevelep dodenn, evel Matthila Ghyka, Ananda K. Coomaraswamy pe Mircea Eliade, o doa desket pep tra digant an drebadelourion e gwirionez. Pa weler hiziv an hollvedoniezh kozh oc'h adakvout anebeudoù he renk a anaoudegezh don, ret hag a-zoare, pa gresk muioc'h-mui en holl skolioù-meur ar bed sevenekaet ar studioù diwar he fenn, den ebet ne c'hallfe nac'h e c'hoarvez kement-mañ a-drugarez da

oberenn Guénon, Schuon hag o heulierion da gentañ-holl.

“Ar veinenn bet distaolet gant ar saverion-tiez a zo aet da boent uhelañ ar volz”, hervez a vez diouganet er Bibl. N'eo ket bet sevenet penn-da-benn c'hoazh an diougan-se, met sklaer eo n'eus nemet an hollvedoniezh arouezel a c'hall bezañ poent uhelañ ar volz en ur sevenadur kristen adsavet. Darn a Vuslimiz o deus komprenet an dra-se a-raok ar gristenion, ha klasket o deus tennañ gounid diwar-se diwar goust ar gristenion. Hag un dle speredel hon eus e-keñver Guénon, Schuon ha *tutti quanti* ? Hag hon eus evel-just. Daskoret o deus deomp ar pezh a oa deomp, zoken ma roent da grediñ e oa dezho o-unan. Poent eo ober dezho evel ma vez aliet gant ar c'hrennlavar muslimat just a-walc'h : “Arabab dit goulenn piv on, resev avat ar pezh a roan dit”.

Ar Pab, e-lec'h ober an dra-se, en deus graet ur meneg difetis bennak eus “droedoù-perc'henniezh” ar vuslimiz war an arouezouriezh kristen. Bez e vefe neuze ur skouerenn ouzhpenn eus lentegezh ar gristenion techet da emvezhekaat o-unan, e-lec'h gourbann fraezh ha sonn an hêrezh kristen.

Olavo de Carvalho

Brezhoneg gant Ewan Delaney, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *A igreja humilhada*, e div niverenn, hini ar 24 a viz gouere 2015 hag hini an 29 a viz Gouhere.

Nedeleg an holl vroioù, Nedeleg an holl dud...

Nedeleg an holl vroioù, Nedeleg an holl dud, Nedeleg pemdeziek

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen.

Sur-mat eo Nedeleg ar gouel brudetañ poblekañ, an hini a laka da dridal ar muiañ a dud er bed a-bezh. Ur wagenn a garantez a darzh, a zifarle en noz-mañ war hon douar. Gouel all ebet e-kerzh ar bloavezh ne zedenn, ne vod kement a dud. Gouel all ebet ne laka kement a familhoù da cheñch lec'h, da veajiñ, da eskemm profoù, ha da leuniañ evit ur wech hon ilizoù. Oferenn ebet n'he deus lakaet da sevel kement a gantikou Nedeleg kaer, en holl yezhoù ha dindan a bep seurt stummoù. Darvoud ebet n'eo bet diskouezet kement en hon mirdioù gant taolenoù mistri vrudet.

Nedeleg ! Ar c'hraou Nedeleg. Ar mabig Jezuz. Ar Werc'hez ha Sant Jozef. Ar vesaerion gant o deñved. An ejenn hag an azen o tommañ ar mabig Jezuz...

Ha koulskoude an darvoud-se pa-z eo bet c'hoarvezet n'en deus ket lezet kalz a roudoù en Istor : ur babig zo bet ganet en ur c'houblad tud paour ha dister, dianav penn-da-benn, en ur c'horn dilezet, kollet, eus an impalaeriezh roman, e Bethlehem, e Palestina, daou vil bloaz bennak a zo. Ar pezh a oa dleet dezhañ chom start en he sav e oa an impalaeriezh-se, da neuze e penn uhelañ he brud, pa roas urzh Aogustus, an impalaer da niveriñ holl dud an impalaeriezh. Ha koulskoude, ar pezh a zo chomet n'eo ket galloud bras Roma, met ur gouel uvel, en enor d'ur bugelig : Nedeleg an holl vroioù, Nedeleg an holl dud, Nedeleg pemdeziek.

Gallout a ra an istorourion, an dud a skiant, an arzourion klask displegañ ar perag eus ar berzh diasur, dic'hortoz-se.

En o Feiz e tegemer ar gristenion diwar an Aviel ar respont d'ar goulenn-se. Met bezomp kalonek a-walc'h evit mont betek penn an diskuliadur a zo graet dimp. Na zisoñjomp ket dreist-holl ez eus daou bennad eus an Aviel evit Nedeleg : ar

Fideled a ya da oferenn ar Pellgent, da noz, a selaou Sant Lukaz o kontañ dimp ganedigezh douarel, amzerel, Jezuz e kraou Bethlehem.

Padal, ar re a gemer perzh en oferenn an deiz a vez souezhet a-wechoù o klevout Sant Yann o tisplegañ ganedigezh beurbadel Verb Doue, kent an amzer.

Peseurt Doue eta en em ziskuilh en darvoud-mañ ? Petra eo deuet Doue da lavarout dimp en ur dremen eus boemerezh ar vugeliezh hervez skrid Sant Lukaz da uhelder doueel Prolog Sant Yann ?

Jezuz Gwir Doue ha Gwir den

Derc'hel a reomp a-benn ar fin da chom diskredik a-walc'h da vister Doue en em c'hraet den. Abaoe daou vil bloaz an holl disivoudoù, holl nac'hadennoù ar wirionez anterin, holl fazioù an denelezh, a laka splann e stourmomp evit chom hep asantiñ d'an diskuliadur marzhuse, ar wirionez vezevellus-se : an unaniezh dizisrannus etre an den ha Doue en ur bersonenn hepken, e Jezuz a Nazared.

Ar riskl a chom bepred hiziv an deiz evel en holl gantvedoù tremenet, da virout unan eus an daou dermen hepken, unan hepken eus daou zoare an Aviel : Doue, ya ! Ya d'ar c'hask kevrinel eus Doue, met en ur lezel a gostez kevredigezh an dud gant he c'hudennoù fetis. Neuze e nijer er speredelezh digorf, divuhez.

Pe neuze : an den ! Ya ! Ya da savidigezh ar geoded denel, met en ur lezel a gostez ar preder eus Doue. Neuze e vesker, e tiferter en

engouestladennoù douarel na roont ket plas ken da alanadennoù ar Spered.

Bewech ma reomp an disparti-se etre Doue hag an den, e tisoñjomp ster gwirion Nedeleg. Nedeleg a huch dimp ez eo liammet Doue ha mab-den evit bepred. N'eus ket a zenelezh wirion hep azeulerezh. Ha n'eus ket a zenelezh wirion hep doujañs evit mab-den hep servij mab-den. Klaskerion Doue ne c'hellont bezañ war an hevelep tro nemet emsaverion evit difenn gwirioù mab-den evel ma adlavar dimp ken alies gwech hon Tad Santel ar Pab. Met ken gwir all eo e koll Servij mab den e ster gwir ma ne vez ket dalc'hmat adnevesaet ha kreñvaet gant magadur e vammenn : karantez Doue evit an holl dud.

Denel eo Doue, ha doueel eo Mab-den

Ret eo mont betek aze : n'eo ket hepken bugelig ar c'hraou hag a zo gantañ an div zremm ! Gwander ha meurdez, breskadurezh ha diventelezh. Pep hini ac'hanomp, pep den war an douar-mañ a zo un den intret gant Doue. Rak Doue a zo karantez. Ha n'eus netra deneloc'h eget karout. Met ni, alies, a vesk ar garantez gant he c'hontrol, an nann-garantez : ne ouzomp ket ervat karout en un doare glan ha klok. Doue, eñ, a zo karantez c'hlan, divesk. Hag ar wagenn doueel-se eo a zo o tiriilhañ warnomp hiziv gant Nedeleg. En abeg da se eo e tihun gouel an Nedeleg e kement a galonoù evel ur c'hwezh-vat a vugeliezh, a nevezadur, a esperañs. Berzh Nedeleg en holl vroioù, en holl bobloù, ha ma vefe ar c'helou mat estlammusañ evit an trede milved-mañ ? Amen.

Yann Talbot

Homelienn evit oferenn ar Pellgent, 24-12-2014. Iliz Sant Melion, Logivi Plougras. Bet skignet war wagennoù Radio Breizh Izel, d'ar 24 a viz Kerzu 2014, etre 20 hag 21 eur.

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

o deus
diskouezet

Lazhadeg ar Batakkan e Pariz : ur wech ouzhpenn ~~o deus~~ an islamourion ar binim a gaver e souratoù 'zo er C'horan, hag en haditoù (skridoù war vuhez o frofed), ha pegen izel eo an deskadurezh muzulmat e broioù 'zo, pa ne ra ar vugale nemet dibunañ dibaouez an testennoù sakr, hep o burutellañ. Ha penaos e rafent peogwir ez eo "Komz Doue", hervezo ? Ganeomp-ni, katoliked, n'eo ket diazezet hor relijion war ul levr, hogen war un den, Doue ha den, Jezuz-Krist, a zo " an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez" (Yn. 14,6).



Lazhadeg ar vabiged : d'ar gwener 13 a viz Du ez eus bet lazhet, evel bemdez-Doue, 600 babig e kof o mammoù, da lavarout eo pemp gwech muioc'h eget

al lazhadeg e Pariz er memes deiz. Kement-se a verkan da ziskouez ervat n'emañ ket an holl euzhuster gant an islamourion, hogen ivez gant hor c'hevredigezh eus an Ankou, he lezennoù braouac'hus niverusoc'h, niverusañ a-enep Doue hag al lezenn naturel, hag he "sevenadur" satanek : daoust ha n'eo ket ur sonadeg eus « Aelez eus ar Marv » eo a veze er Batakkan ?

Enbroidi er-maez lezenn : da vihanañ daou eus islamourion gwalldaolioù gwadek ar gwener 13 a viz Du e Pariz a oa enbroidi dibaper nevez-deuet dre Durkia ha Gres, eme prokolor Pariz.

Komunouriezh : Yuri Bezmenov, bet er c'h-KGB ha tremenet d'ar C'hornog er bloavezhioù 1970 en doa dezrevellet e 1985 labour e aozadur, ha pergen ez ae 85 % eus oberiantiz ar c'h-KGB da

“zarblegañ²³ ar skolidi hag ar studieren kornogeuropat d'ar c'healiou sokialour e-pad tri rummad-tud da vihanañ”. Displegañ a ra kement-se dre ar munud ha pergen penaos e rae ar c'h-KGB evit goprañ an dud o doa levezon evit distablaat ar bed nann-komunour, ha penaos o deus labouret evit diskar an talvoudoù kristen er gevredigezh. Se a zo kement ha diskleriañ ez eo bet margodennet a-grenn ar paour-kaezh c'hwegonteizhidi, a zo bet eta “pennoù-sod servijus” ar gomunourion, ha drezo da ziskar diazezoù naturel ar gevredigezh, ar familh pergen, hag an holl frammoù kevredel a voe gwastet d'ar marv : ar vuhez a-gevret, ar relijion, ar vrogarouriezh...

Bodadeg Maered Frañs : goulennet he deus e vefe strishaet ar gwir evit ar familhoù da zigeriñ skolioù er-maez kevrat gant ar Stad, ha ma vefe difennet sevel kreier Nedeleg el lec'hioù foran, pergen an Tiez-kêr. Renet eo an AMF gant an Ao. Barouin, mignon Chirac ha frank-mason, sur a-walc'h eta.

Karta ar yezhoù bihan : ar Sened gall en deus miret ouzh ar Garta da vezañ kaougantet gant ar Stad C'hall. Bloavezhioù ha bloavezhioù a stourm o deus diskouezet ur wech ouzhpenn hollvelouriezh jakobinour ar bolitikerien c'hall.

Ar Sened war an Tiegezh e miz Here en doa roet tro da ziskouez disrannoù grevus en Iliz, pergen saviad disvoudus eskibien Alamagn. Evel-just ne c'helle ket ar Sened kemm kelennadurezh daouvilvedel an Iliz war an Tiegezh, diazezet war gomzoù Hor Salver. Un dra nevez a-bouez evelkent : Santelezhadur Louis ha Zélie Martin a zo bet graet o frosez a santelezhadur o-daou a-gevret. Diskouez a ra ervat an Iliz ez eo ar santelezh galvadenn an dud dimezet kenkoulz hag hini an dud dizimez.

Beleion nevez e Frañs : kenderc'hel a ra siwazh niver ar veleion a vez urzhiet bep bloaz da zigreskiñ e Frañs. 120 e 1915, e skoaz 140 e 2014 (kontet eo e-barzh al leaned). Hini ebet e Penn-ar-Bed nag e Sant Brieg, daou e Gwened. Daoust ha bezant e vo bepred feiz e Breizh pa zistroio an Aotrou Krist ?

E 2016 e kuitaio trapisted Mellereg o abati, e-kichen Kastellbriant (La Melleray). Tost a 900 vloaz e vezint bet o chom enno, war-bouez 1790-1817 en abeg da heskinerezh an Dispac'h Gall, pa oa bet diazezet war-dro 1142. Savet o doa abati La Melleray en Iwerzhon. 200 manac'h e oant e 1848, chom a ra 10 ar bloaz-mañ. Dont a ra kumuniezh “An Hent Nevez” d'en em ziazezañ eno. Abaoe 2011 ez int diazezet en abati Boken.

“Emgleo Breiz” o serriñ e stal. Klasket en doa Fanch Broudig embann levrioù er skritur unvan, un nebeut bloavezhioù 'zo (“Al liorzhour”...), hogen hep displegañ e zisentez, a zislavare a-grenn e

emzalc'h tagnous a-enep skritur ar brezhoneg unvanet da vat gant emglev 1941. Patrioted an tu kleiz gall eveltañ hag ar gloer e karg eus ar brezhoneg en eskopti Kemper a savas o skritur dezho e 1957, harpet gant ar Stad C'hall, dre ar skol-veur : skritur ar mestr-kelenner ha chaloni Falc'hun, harpet gant daou ezel anavezet mat eus ar PCF : Le Berre ha Le Du, setu aze hêrezh Emgleo Breiz, steuziet en un hent dall, evel ma oa kaer gortoz. Bremañ m'eo echu da vat amzer aour ar vrezhonegerion a vihanik, Stivell hag ar skoazelloù arc'hant, bremañ ma n'he deus Emgleo Breiz kealiadurezh ebet ken da embann a vefe diforc'h diouzh kleizelouriezh blot an Emsav en deus dilezet ar vroadelouriezh, ne oa abeg ebet na serrfe ket e stal. Bremañ eta ne chom nemet Kuzul ar Brezhoneg hag e is-merkoù (Al Liamm, An Alarc'h), ha Skol Vreizh war an dachenn eta, evel tiez-embann a vicher. “Brud nevez” avat, o c'helaouenn, a gendalc'h gant e hent er skritur patriot, na vez mui implijet gant den (na zoken gant eskopti Kemper a embann e levrioù-kantikoù gant ur skritur disheñvel muioc'h mui, hini “Minihi Levenez”).

Buhez hon Emglev

E miz Here, e **Gouel al levrioù** e Karez, e oa deuet kalzik a dud da welout stalig Imbourc'h, hag gelllet 'zo bet skoulmañ darempredoù a-hed an daou zevezh.

Daoust ma-z eo prest “**Ar Bibl Santel**” da embann, war bouez an notennoù, hon eus divizet chom hep moullañ anezhi dre ma n'eus ket a c'houlenn e gwirionez, en un “Emsav” digristenaet-naet. Gortoz a vo graet eta ma teuo deizioù gwelloc'h.

Anv 'zo da aozañ ur C'hamp Katekiz e Bro-Wened e-pad an hañv, hogen n'hon eus keloù resis ebet. Kroget 'zo bet da dreiñ **ar c'hatekiz** holl anavezet “La miche de pain” evit ar vugale.

Liderezh an Eurioù : mont a ra war-raok gorrek-tre, dre ziouer a genlabourerion. Evelkent emamp gant an trede levrenn (war beder) a 1811 pajennad. Chom a ra war-dro 3000 pajennad da aozañ diwar al latin... war 8000 bennak. Trugarez vras da Baol Kalvez a dro ingal ar c'hanennoù diwar al latin, o klask ouzhpenn-se lakaat ar gwerzennoù da rimañ ha da vezañ mentet ingal da c'hellout o c'hanañ war an tonioù latin pe vrezhonek. Ul labour hir-mat eo aozidigezh Liderezh an eurioù, a dra sur, hogen un oberenn da badout ez eo, evel ar Bibl ! A-drugarez d'an oberenn-se ez eus tu da ganañ gant an testennoù kefridiel, a-unvouezh hag a-gevret gant an Iliz katolik eus ar bed-holl, meuleudi da Zoue en hor yezh, evit an holl ofisoù : lennadurioù, beure, kreisteiz, abardaez, komplidoù. Un doare dispar eo (an doare erbedet gant an Iliz, da lavarout mat), da skoulmañ un darempred diastal gant Doue, ouzhpenn ar bedenn bersonel eveljust, en ur zeskiñ ur bern traoù war ar marc'had : Skritur-Sakr, prezegennoù an Tadoù eus an Iliz, buhezioù ar sent... ha brezhoneg

²³ Darblegañ unan bennak : conditionner quelqu'un.

yac'h ! Petra pouezusoc'h a c'heller ober e brezhoneg eget pediñ ? Rak ar bedenn a chomo war hol lerc'h. Petra, a vrezhon, a zreistpado er baradoz, nemet yoc'had ar pedennoù a-berzh ar Vrezhoneg ?

Skaouted Bleimor : Ganet e oa bet Skaouted Europa diwar Skaouted Bleimor, ha renet e voent e-pad pell gant Pêrig ha Lizig Keraod, lennerien feal da Imbourc'h, mignoned da Youenn Olier. Ur bre "Bleimor" a chom c'hoazh gant Skaouted Europa, evel un aspadenn eus o istor-orin. Gant ar bre-se e c'hell ar skaouted a fell dezho deskiñ kanaouennoù ha pedennoù e brezhoneg, deskiñ istor Breizh, buhez sent 'zo, hag ivez pleustriñ rekipeoù kegin, tresañ diwar danvez Breizh, ha zoken aozañ kampoù dezho. E miz Here 2015 e Santez-Anna-Wened da geñver pirc'hirinded-bloaz Skaouted Europa Breizh (5 departamant...) e oa bet deroet ar bre Bleimor da Skaoutezed Landerne, dirak 2000 bennak a skaoueted ha skaoutezed, gant Kristell Ramon, unan eus renerion al luskad-mañ, ur verc'h d'hor mignon karet Youenn Souffes-Després.

Jozef (Job) Lec'hvien (1919-2015), a zo aet da anaon e penn-kentañ miz Gouhere. Lidet e voe e obidoù d'an dri en e barrez c'henidik, Plaerane. Ouzhpenn 20 beleg a oa deuet hag an eskob a bennlidas evel reizh. Kannadig eskopti Sant Brieg ha Landreger ne veneg ket e oa bet levezonet don, sur a-walc'h, gant personelezh ha drouklazh e eontr Pêr Lec'hvien, person Kemper-Gwezenneg e 1944 gant paotred FFI, en abeg d'e vennozhioù emrener. 25 bloaz e oa Job, hag er c'hloerdi d'an ampoent. Kure ha skolaer e voe neuze e-pad 25 bloaz e Plijidi. E 1969 e voe rebechet outañ kemer perzh e Talbenn-Dieubiñ Breizh, ha toullbac'het, hogen didamallet e voe. Neuze e voe anvet da berson e Kergrist-Moeloù, hag e klaskas adskoulmañ al liamm torret etre ar yaouankizoù hag an Iliz, oc'h adsevel chapel Itron-Varia an Enez, hag o vont da dredeog war an dachenn melldroad... da Sul vintin ! Dreist-holl e vo dalc'het soñj anezhañ evit ar pezh a embannas, ha dreist-holl an Testamant Kozh ger-ha-ger diwar an hebraeg bet troet gant e vignon gouiziek Pêr ar Gall, ur moulladur a baeas gant e wenneien hag a voe gwerzhzet fall : 1000 skouerenn a oa bet tennet eus

levrenn gentañ an Testamant kozh. An ti-embann a voe savet neuze : "An Tour-Tan". Dindan anv Job Kergrist e deus embannet ur salmaoueg rimet, aes da implij evit ar c'han eta, ha nouspet embannennoù all a bep seurt : prozez santelezhadur sant Erwan troet diwar al latin, istor abati Koad-Malaouen troet diwar galleg Aleksy Presse, Buhezioù Sant Tudual ha Sant Samzun, istor chapel Itron Varia An Enez e Kergrist-Moeloù, Prosez santelezhadur Charlez Bleaz (testenioù). Levrioù all a gaver en e di-embann evel Mister Santez Anna (Mab Sulon-Lorinquer), ur Basion "Gefang (prizoniad) e Neusalz/Oder" (Pêr Ar Gall), Buhez Sant Gwenael, Ecclesia de Eucharistia Yann Baol II, Ritual ar re glañv, hag all hag all.

Unan eus e labourioù a servij bemdez da izili Kristenion Breizh eo "Pedenn an Iliz" a zo bet advoulet meur a wech evit aotren d'ar vrezhonegerien pediñ ar breviañ gant troidigezh nevez « Liderezh an Eurioù » goude Vatikan II, ha bet lieskrivet e 1977 gant ar beleg Jakez Ducamp e skolaj Sant Jozef ar Releg-Kerc'horre. War an diwezhadou e oa pres warnañ 'tremen', a lavaras din, da heul bezañ bet kouezhet fall war e livenn-gein. Setu aze adarre un ezel oberiant-tre eus EAT o vont davet an Tad da erbediñ evit pobl ar vrezhonegerion. Pedomp gantañ eta, ha pedomp evitañ ! T.G.

Setu deuet dibenn 2015 gant an niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc'h*, soñjit, mar plij, kas ho skodenn : 16 € (kresket un tammig en abeg da gresk mizoù-kas ar Post) da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Trugarez deoc'h en a-raok !

Evit **Nedeleg** ha **Kala-bloaz** profit levrioù : *Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue* gant Youenn Olier hag *An Emgav-Chanter ha danevelloù all* gant Yann Mikael, 18,50 € franko, pep hini. Goulennit ouzh Yann Mikael 12 straed René Giraud 44130 Blaen

Nedeleg laouen deoc'h holl, hag hor gwellañ hetoù evit ar bloavezh nevez a zeu : *Levenez, yec'hed hag evurusted leizh ho ti!*

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridadozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulllet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X